

NOUËL !

VI 81

Air: Quand Dieu naquit ~~par le~~ *angel.*

Deuomp buhan pastoret,
Gant an El ez omp galvet ;
Pebez kelou dous meurbet !
Hor Salver a zo ganet ;
Eur chraou paour ha dister
Ea deus eboazet hor Salver :
Deuomp prest, prest, prest,
Deuomp dar, dar, dar,
Deuomp prest d'ar c'hraouik
Da velet ar Mabik.

Unanomp holl hor moues
Leun a laouenidigez,
O velet Doue diskennet
Evit delivrans ar bed ;
Deuomp holl en eur gana
Kantikou ar re wella :
Deuomp de, de, de
Deuomp da, da, da,
Deuomp, de, deuomp da
Deuomp d'e adori ;
Ouspenn e saludi.

Satan e kreis an ifern
O tevi er flammou,
Netra tout ne veur espern
Evit koll hon eneou ;
Greomp holl goab anezan
Brasoc'h mestr hon neus d'ezan :
Treae'h da, da, da,
Treae'h lu, lu, lu
Treae'h da Luster
Ez eo hor Salver.

Chant de ce Noël = français. On le trouve indiqué dans le volume de Noël bretons
 publiés chez Lédan sous ce titre: "Pastoral vas quimvezes t.c.". A la p. 76. Il y a un
 vers dans le genre de celui-ci, avec l'indication suivante: "Var ton: Quant Dieu
 magnit à Noël." — Ce vers est signé: Le boat, de Morlaix.

Pebes prezant da ober
 Da enori hor Salver,
 Va mignon, d'e vailluri
 Digasit lien d'e di !
 Va breur, eur maout maget mad,
 Me, eur c'havel a dilhat
 Ha Yan leas, leas, leas,
 Ha Per tân, tân, tân,
 A Yan leas, a Per tân
 Evit galloud toma
 Ar mestr eus ar bed-ma.

Mes ar santela feson
 Evit e adori
 Eo kaout devozion
 A beza fidel d'ezi:
 Greomp holl gwitibunan
 An holl euvrou evit-an
 Setu gwell, gwel, gwel,
 Setu la, la, la,
 Setu gwel, setu la,
 Setu gwella offrand
 Propr d'e renta kountant.

(Noel koz kavet gant eur mignon).

an Ead Bourdoulous 1. J.

Moar ar Vretoned. n.º du 6 Janvier 1901.

M. J. Feyroy connaît cet air
 Le piec de le noter

— Vis à la Béd... Ville Quimper un Noël exactement du même genre
 en breton de Venney — cf. Recueil portant au dos: Cantiques. B. ter 12, n.º 222 bis. (Ancienne Cole)
 Le piec appartient au S. de Jeany ~~quint~~ Contony de ce volume. p. 91. (N.º 47 de 1760
 "Hinnach 2. ma X-mas Breider,
 Gannett Jeuel Heng-Salver (B) et...")

Musik Nr. 79
 1877